

DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ENTRE

UR C'HEREER

HAC

UR BOTOER COAT.

Var un ton nevez

Mar gallan goul ar feñon, e teuin da rima
 Eun disput a neve flum, d'en em divertissa,
 Savet entre ar C'hereer hac ar Botoer coat :
 Pa vent crog en eur boutail int daou pot delicat.

O daou o deus prometet e mige digante,
 Goude formi eun disput excellent entrèse,
 Eun doucen vio fritet hac eun tam bara guen,
 Hac eur banne da effa en lin ar ganaouer.

Mar be glebiet un anchen ar bombard a zono,
 A zilao gant parfeti eun darn a reson,
 Vit ho lacat da zisput an eil oc'h e guile
 Ha neu pás rima netra nemert ar virione.

— Er gouan ee'h intentan, eme ar Botoer coat,
 E me a zeu da visean treid an dud delicat,
 Ha te, Quereer infam, gant ta votou ler
 A zigaç ar c'hlenvejo hac eun nombr a vizer.

— Eun tam eo islimet hnelloc'h ma etat
 Evit n'en deo-da himi, pot ar Botou coat.
 Ma rancfe beajerien bale gant sorgello,
 E vent eun anter hirroc'h oc'h ober campagno.

— Evit prepari'n douar an lakat an treval
 Eo eun dra necesser caver eun Botou coat,
 Ne voeler den o palat er parc gant botou ler
 Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on get necesser.

— Goud a ran eo ar botou coat a gonserv ar yec'het
 Hac a brepar an douar evit lacat an ed,
 Evel ma c'her da redec er parc gant o vejo
 E scanvoc'h ar botou ler evit eur sorgello.

— Pa deui an'erc'h, hac ar scorn, hac ar gouan calet,
E ranko ar C'hereer paca e vinaouet ;
Ha me doucho an'arc'hant partout er marc'hajo,
Ha te a sello ouzin ha digor da c'heno.

— Pa erruo ar mis meurs, hac an neve amzer
Da visca an habijo brao hac ar botou ler,
Neuze na vo istimet netra ar boto coat ;
Ur boto ler da vale a so traou dilicat.

— Alies e renq'es mont da dy ar c'hivijer
Ha na pe nemet tri scoet pe eun tri scoet anter,
Ha me laca assambles bete c'huec'h ugent scoet
Da brena ar c'hoat boto evit ar baysantet.

— Goel a ze dit, ma mignon, pa teus eur bern arc'hant ;
An neb o deus nebeutoc'h a vev honestamant.
Me a deb q'ic ha zouben, ma yod da greis-de :
Ordinal ec'h intentant on bevet couls a te.

— Poent eo din finissa rac an nos a dosta,
Hac an hostis a jeno pa na effomp netra,
Hac a roi din hon c'honje, Coader a Q'ereer,
Da bartian deus he dy ha mont da gaet ar guer.

— Ebars en hostaleri e vo rezonio,
Disput entre ar vignonet ha chass-bleo evecho ;
Ar c'hoste crea c'hone ebars en peb affer :
Mar q'eres ni a velo, eme ar C'hereer.

Goude leis cov e crogjont vel daou guy animer,
Ha stagan d'en em gannan evel tud malisset,
Q'en ha ranq'as an hostis q'emer e vas ribot,
Ha sq'ei voar zin discregui en sacon ma oant crog.

Goulennomp eur chopinat d'en em dispartia :
An hostis on servijo mar deuomp d'e bea,
Hac evomp pep a vanac'h e fin ar ganaouen ;
An oll a ranc caout boto pe vale dierc'hen.

An hini en eus rimet an disput dilicat
Savet entre eur C'hereer hac eur Botoer coat,
En eus gret meur a hini, e hano *Yan ar Goen*,
Hac a veler ordinal en fin ar ganaouen.



FIN.

Ar Vran hac ar Louarn.

Voar an ton : *Tra deri dera, tra la la.*

Eur vech eur Vran coz ral, var eur blanten perchet,
A zalc'he en e vec eur fourmajen scornet ;
Pa zantas ar houtez-se, eul Louarn nemeur bras
A zostas polimant, a dar Vran lavaras :

Var ton an tra la la la, var ton an tra la la la,
Var ton an tra deri dera, tra la la.

— Ah ! bonjour ta, Vran quez, a penos a rit-hu ?

— Me non quet fal, merci, laras ar Vran dustu ;

A va oll bugale, nemeur ar c'hiantekvet

Pehini gand ar scorn a so goal enrumet.

Var ton an tra la la la, etc.

— Min toue vad, Vran quez, c'hui so goal brao guisquet,
Dre sur en ker Paris e ve gret o tiller.

— Ya, respontas ar Vran, pa glevas ar gomz-se,

Rac en ker Lanhuon ne visquer qet guis-se.

Var ton an tra la la la, etc.

— Ho ! mar canit quen brao evel oc'hu guisquet,

Neus quet er baros-mâ caner vit o heuillet.

Canet-ta dem, mar plij, pe cantic, pe chanson,

Ni glevo ac'hanoc'h gant cals attention.

Var ton an tra la la la, etc.

Pa glevas ar frim-se, ar Vran, digomplimant,

A ganas eur chanson tost diligentamant.

Ractal pa gomanças, pa ne oa quen dalhet,

A goeas eus e vec e fourmajen scornet.

Var ton an tra la la la, etc.

Al Louarn, laouen bras, pa velas an dra-se,

Lampas var ar fourmaj, ac en debas, ma fe.

Neuse e lavaras dar Vran disconcertet :

— Ne ousoc'h quet cana, noc'h quet tam brao guisquet.

Var ton an tra la la la, etc.

Pa glevas quement-se, ar paour quez Vran chagrin
Lavaras d'al Louarn : — Va fot, te so bed fia ;
Mes evit eur vech al, ne lesin quet biquen,
M'en assure did, Louarn, dibri va fourmajen.
Var ton an tra la la la, etc.

KENTEL.

Cetu eun avis mad var ben ar chanson-ma ;
Vranet coz pe yaouanc, s'haouet tout brema :
Mar carit ar fourmaj, pa debfot anezan,
Ne ganit quet neuze, chaquit alao nean.
Var ton an tra la la la, etc.

PARC AR VINGLEUZ

Voar eun ton da ober.

E pad an de pelec'h voac'h chomet,
Autrou quez Bourjet,
E parc Vingleuz an Daouinet,
Mignonet din, mignonet,
E parc Vingleuz an Daouinet,
Pehini meus bet prenet.

Enan peitra so bet gret
Autrou quez Bourjet

Grac dan oll asistantet
Mignonet din, mignonet,
Grac dan oll asistantet
Ar parc so bed difonset.

Dre sur houï so goal curet,
Autrou quez Bourjet

Pa so dent cals a dud vad,
Disicour tout a galon vad,
Evit neira da labouret
En o c'omannan Rosangoat.

Ar zon-ma neus composet
An autrou Bourjet

En honor he vignonet
Peré tout vilza deuz poagnet
Da veurz, seiz varougueh
Mil eiz cant tregont ac ngen.

E ty Ar Goffik, e Bapthol.